

SERMON
Michel Morin.





SERMON

GRÊT

VAR MÂRO

MICHEL MORIN,

EUS A BARROS BEAUSÉJOUR,

Prononcé et dirigé par un assistant.



E MONTROULEZ,

E ty LÉDAN, Imprimer-Librer.



SERMON

MICHEL MORIN.

Omnis homo mortalis.

Oll omp sujet d'ar maro cris.

PELL-amzer zo, oditoret,
Abaoue ma méus remerget
Eun dra hac a zo necesser:
Oll, siveas, mervel a rânqer;
Oll voar sujet d'ar maro cris:
Omnis homo mortalis.

Pa foilletan va oll levriou,

Pa repassan historiou
Eus an amzeriou dremenet,
E remerqan enne scrivet
Penos Cesar, Napoleon,
Cyrus, Achit, Agamemnon,
Epaminondas, Tamerlan,
Xerxes ha Thamas-Koulikan,
Ulis, Hector ha Pompee,
Alexandr, Annibal ive,
Ha memes bêleg luch Ar Baill, (1)
O deus rânqet saillat er baill;

(1) Auter Qoydin Sant-Yan-ar-Bis.

Ha mervel, en despet dezo,
 Hep respet ebet d'o-baro.
 Gouscoude an oll lécturiou
 A meus gréi eus o maleuriou,
 N'o deus qet qement va zouchet
 Evel m'en deus va afflijet
 En deiz-màn, hirio an deiz,
MORIN guèz, maro en hor c'breiz.

Crenit, plant sempl ha disouten;
 Gouez frajil, izellaît ho penn:
 Cèdr al Liban a zo coezet;
 P'evit tra na güezoc'h-hu qet?
 Evit rëi da entent güelloc'h,
 Piou ne varvo qet, a zònj deoc'h,
 Pa zë **MORIN** a zo maro!
Allas! netra, den n'achappo;
 Credit-én, parositionis:
Omnis homo mortalis.
Allas! oll mervel a rànqer;
 Pebes setanç en pêvar guer!
 Cede te aze, **MORIN** guez,
 Evel biscoas bet ne vijes.
 Bet out; mes, **allas!** ne dout mui:
Sic transit gloria mundi.

Evessaît, parositionis,
 Dec'h, dec'h divea er güelis;
 Ia, dec'h e velis **MORIN**,
 Yardro c'hoec'h heur eus ar miatio,
 Ouz en em Bourmen goustadic
 En ale eus e liorzie;

E voa ec'h ober eur regal
 Gant eun tronçon hara zegal,
 Var bini en devoa leded
 Eur güiscat qignen hed a hed.
 Ia, quer calonec en dëbre
 Evel e tébrfaç'h énn tam paste
 Diouz piñi an amañon teuzet
 A goesse var ho piziet.
 P'am güelas o vont er jardin,
 E commandaças da vousc'hoarzin.
 Ac'hanta, Dom Yan, emezâ,
 Ne qet evelleu eo beva?
 Te voa drol, MORIN, gouscoude!
 Te vouie farçal a zoare!

Nan, nan, jarpigoal m'en attest,
 Ar Maro nê qet greg honest,
 Hac he c'hrouga a gafen mat,
 Hep respect dezi na d'he oad,
 Piou en devije lavaret,
 P'en devije bet da velet.
 O tijuni, dispar MICHEL,
 E tlejeante biqen mervel?
 Güir eo sur, den n'el lavarje;
 Mes maro mic out gouscoude!
 Ne qu'elimp mui tanfoeldr biqen:
 Pebes coll Demp! pebes anqen!

En effet, m'er goulen ouzoch:
 Piou a laqayo braul er c'hloc'h?
 Piou a zervicho an oferen?
 Piou a rai tout hiviziñ?

8


N'eus den capabil eus aandra-ze,
Paour qèz Moraw, vəmədouz-te.
Te roe ar bara-bentquet;
Te rē ar guest tep eut peglet;
Te a gane ourz al lutrin,
Ispicial gant eut leum güin,
An antienea, eoulz pe well
Hac ar Roux cōs eus a Gastei.
Te da-nnan a rē d'ar chass
Eus ap iitis scarza o flaç;
Hac erfin, evit da veuli,
Te voa hon *Omnis homo*-ni.

M'ho quēl, o clévoz qement-mâ,
O tirolla ha ! ha ! ha ! ha !....
C'hoarzit-ta, loueoù penn-follet;
Anat-e zeo oc'h azennet.
Honnes eo al lec'h da c'hoarzin,
Abalamour d'eur pez latin
M'ho pe ar sqeud eus ar sqiant,
E respectifec'h an dud savant,
Hac ec'h admirfec'h gant résou
Ar pezion latin em zezmon.
Hac evit commanç hoc'h instrui,
Omnis homo a sinifi
Eur potr rend brac eur potr capab
Da ober eun dra, mar deus mab;
Anfio, eur potr mat' ep pep tra,
Eur potr n'en deus eon rēc netraç
Eur potr fin hac eur potr diouc'h-eu,
Nonpas souten eteldoc'h-hu.

Mes eus dra eo hac a zo sur,
 Erit ne mā qet er Scritar:
 Nep a zo sot a zònj dezàn
 En sotoc'h an oll eguetàñ.
 Getu eno petra zo cos
 Eus an ompinionou fos
 Pere ho poa eus a Vorin,
 Abalamour ma voa badin,
 Ha ma talc'he eul lérrou gûen
 Hac eur bragouz rù melen,
 A bini' leze ordidat
 Lest e roched da zivat,
 Mes m'am guetec'h ne deus an nôz
 Gant va bouozas dres, dros, dros;
 M'am gûflec'h neuze er gaïsse,
 E sönfec'h te sot sot yen-me.
 Nan, nau, n'en dê qet, sud signac'h,
 An habit a ra ar manach.
 O cleuq ! nan, ne zoch' qet ganti;
 Calz c'hoas a râncfec'h da zisqi;
 Hac evelse va zelaouit,
 Mar fell déc'h-hu tenna profit.
 Au neb en deus tabatieren
 A ell bremân laqat prizen;
 Hac hoc'h attantion neuze:
 Daou boent a riñ, netra goude.







QENTA POENT.

Goude'r maro, peur liessa
E ve revelet meur a dra,
 Evel m'eo an turubaillou;
 Ar burzudou, ar marvaillou
 Grêt gant ~~ted~~ vras, tud a noblanc,
 Grêt gant chass droug dre excelanc.
 Var guement-mâ, hep mont larcoc'h,
 E lavarin daou gueric deoc'h.

En effet, parossionis,
 C'houi oc'h eus bet sur d'unaatis
 Da zonjak ha da exedita
 Var'n traou a ras MORIN amâg
 Breman zo'n nebeut bloaveziou,
 Pa grogas bresqin el lostou
 Ar zaout, deiz gouel autrou sant Marc,
 Pa lammont oll etmèz ar paro
 Qement bioc'h a lvoa er c'hartier
 A ziredas oll e leur kær,
 Hac e lamjont evel d'aned
 Dreist ar porastel er vêred,

Michanç da bedi sant Erbot
 Da rî amann leiz ar ribot.
 Mes, c'houi zivinfez pennou maout,
 Peseurt santimant neus ar zaout?
 Diana, lammet a rejont,
 An dour beniguet a evjont,
 Ha c'hoas meur a zishonestis;
 Mes hêvel tout-a zo isqis.

Ac'hanta! sònj a deu dêc'h-hu?
 Daouzec vloas zo bet da vis Du,
 Me meus sònj mat, rac en deiz-so
 E voe grët foar vad ganfan-me.
 C'houi a grie var boez ho peñi.
 Evel eun arme a ezen,
 M'ho clëvet, da bep nebeuta,
 Eul léo-aater ens ar bourg-mâ:
 « Forç! forç! sicour, autrou Cure;
 » Savit, savit, en han' Dobe!
 » Ar zaout zo lampet er véred.
 » Aon hon eis e vent entêret.

MORIN, difunet dre ar chsi,
 A zifflip ermèz eus a dy;
 En e zaouzorn eur forç'h spérn güen,
 Hac er véred en eul lam cremp;
 Mon aqipach-se d'ar zaout;
 Bazad d'an hini à ell caout,
 Tol fore'h d'oumâ, tol troad d'onnent,
 Qement ha qement m'a râncjont
 Lampat ermèz eus ar véred
 Buannoc'h eguet n'oant antreet.

Ac'hanta, eleuq, ac'hanta ast,
 Ac'hanta, na var guement-mâ
 Petra oc'h eus da lavaret?
 Aon ho poa rac al loutinet;
 Ha ne gredec'h qet, eme c'houï,
 D'ar poent nôs-se n'em hazard.
 Mes MICHEL MORIN a ras deoc'h
 Mont pepint gadt e vioc'h
 Ar rest eus an nôs da goosqet.
 Ha c'hoas, tud cris, ne voelit qet
 D'eun den quer mad, anfin d'eun den
 Qen douguet d'o amezeyen!
 Rac n'oa qet ret bezan neuze
 Beze'n e foched d'at point-se
 O varecat ar vêrejou.
 En risq da goea er beziou,
 Pa vda an oït en o pdele
 Qer cousqet vel ar vioc'hase
 Pini a glêvan o roc'had.
 Clêvet a resto, eur vech tad,
 Louzen gôs, àmpoeson ak e hit
 Difun, eur vech all e cousqi.
 N'oc'h eus biscoas den ac'hanoth
 Sónjet er vad a euro deoc'h;
 M'ho pija, e vijec'h touchet,
 Pa velit e zeo decedet.
 Allas! Morin guèz zo maro!
 An drô-mân eo grêt e vrô.
 Cant güech hemdez e lavarat,
 En MICHEL MORIN pa zonjan,

E voa domaj bras d'ar reue,
 Defot ne voa bet en arme;
 Rac eur c'habiten excélaut
 E vije bet certenamant,
 Hac e teugje hirio an de
 Cocarden, croas-merit, clezo.

Memor am bezo da james
 Eus ar pez a raz an devez
 Ma varvas e vreg Perina,
 Eur vreguic eus ar jentila;
 Eur vreguic fur, temperet mat,
 Pront da denna, lent da laqat;
 Carantezus en peb féçon,
 Scouer ar bobl; phenix ar c'hanton:
 Eur pezic serviable en ty;
 Eur botrez bac a voa ganti!...
 Ouspen ze, fidel bras d'e goas
 Vel Helena da Velenas,
 Evel Jupiter da Junon,
 Evel m'oë da Vedee Jason,
 Evel Venus d'ar c'ham Vulqin:
 Evél calz a re all anfin.
 Ha c'hoas memes e leverer
 E vouient mat en em ober
 Qent na voa gantàn na ganti
 Mansion ebet da zemezi.
 P'oa Perina var be goele,
 He zicouras dre charite
 Da vervel. Pa fellie dezi,
 Sot e vije miret outi.

Pa voe maro ar glânvourez,
 E redas d'ober an toul bez ;
 Neuze tigoras ar c'heler ,
 Hac e laqas brânl er c'hleyer ;
 Redec da guerc'hat Perina ,
 Crapat enni hac be zamma ,
 Da gaout ar bez neuze souden ,
 E zeulek enni var he fenn ;
 Cana coulz hac al *Liberia* ;
Dies iræ, dies illa ;
 Teuler gant ar bal var he c'hein .
 Douar ha pri , grouan'ha mein ,
 He enterri , en eur güir cren ,
 Hep biscoas gouela beraden .
 Neuze evit güir voa ebat
 Guelet MORIN o labourat !

C'hoas e c'hoarxit , banden loeyiou ,
 Cac'herien en ho coupeleyou :
 *Pebes truez eo ho quelet ,
 Tud divalo , imbecilet ,
 Tud diréson , traou debordet ,
 C'houi a rafe din coll va speret !
 Me zo sur , pa ouzoc'h hirra ;
 Na ouzoc'h qet nemeur a dra .
 Ne qet eur sot a zo ganéc'li ;
 Hit atao , m'en talvezo déc'h .

Ha te a gléo ? azen guernoc ,
 Me rei did lêzel da storloc ,
 Te just pehini a zo aze
 O tiscrougaal bars eu toul-ze .

Foeï , foeï , foeter e spillesmic ,
 A golles o c'hoari poullie ;
 Ma rancan-me sur mont aze ,
 E pêi va c'hamejou-me .
 Rac an daboulin e spontes ,
 Ha rac ar soudardet iveauz .
 Nan , Morin n'oa qet eveldout ,
 Rac ne sponte eus netra'n tout .
Probatur verbi gratia .
 Peoc'h ! hoc'h attaption amâ .

Mab ha mab-caer ar C'holas bras
 En em zifframe evel chass
 Er jardin , divarben ar prun :
 Er güez ne voa chomet nicun .
 Ar bléo a luye dre ar jardin ,
 Ha n'oa qet apparâç a fin ;
 Rac , an daou laër , an daou fripon ,
 A saille evel daou leon .
 Hap ! hap ! eme MICHEL dezo ;
 Bremâ , potret , m'o sicomro .
 En dont diou gamet var e c'his
 Evit qemeret e franqis ;
 Neuze e crog e lost e zê ,
 Hac en eur pic lam var ar c'hê ;
 Crap en coliereou va fotret ,
 Hep caout evito nep respet ,
 Stavad d'emân , tol troad d'ennont ,
 Flip , flap , hac en em separjont .
 Eun den a gavas var e du ,
 A zisclapâs zo qen er ru ,

Hac a ras dezo e bouea
 Brao bras bac e relounca.
 Evelse en eur vont abiou
 E rē vad ne voa fors da biou.
 Evidoc'h-hu, bouc'hes anat,
 Ne dalit qet eur c'horzedat;
 Raç panefa MICHEL amâ,
 E voant c'hoas oc'h en em gamma.

Ma conten dêc'h va fableniou
 Tennet eus a gos tolennou,
 Neuze ec'h alfach lavaret :
 Dom Yan hoñ lacu da gousqet,
 O conta deqmp eus e guelorn
 Eur bibl nevez ha comzou bôrû;
 Mes ne dê qet traou tremènet,
 Na rismadellou cos grac'het
 Eo a lavarân dêc'h bremâ,
 Mes ar virionez ar sclerra,
 Eruet dirac ho taoulagat.
 E velet oe'h eus e falc'hat?
 Jarnidiaoul ! brava falc'her !
 Sacristîl brava labourer !
 Euu dudi, dam ! voa e velet.
 Et voan a benn caér da sellet
 Pa falc'he foennec'ar prat dîou,
 Ha dridal a rē va c'halon.
 Pebes marvaill er font ive !
 Abars commanç e tivisqé,
 Ha goude var eun alanad,
 Hep na boursoufl na passat,

E crog en e falc'h, fret, fret, fret,
 Den na vije er pen éruet :
 Iac e veljec'h en dro dezâ
 An ervenou yéotro coea.
 Cru-ta hep leau er penn,
 Deus e c'hourris e lam e ven,
 Iac el lem, fes, fes, fes, fes,
 Drem e fals eus an daou gostest.
 Goude var gorf e rochet bloc'h,
 Per gleb, jardogoae! hac eur broc'h,
 E laca e ven en e blas,
 Iac e lahour evel biscoas.
 Evit güfir ee'h eller conta,
 Sur falc'hic natur en devoa;
 Mes gouscoude eo ret avoui
 Voa güelloc'h an troad eviti.
 Iac, clêvit, n'oa' qet Yan na Pêr
 Voa MICHEL MORIN, va c'homper.
 Armid, ar vagicianes,
 Ne rô qet quer buan eur pales
 Da ma rô Morin e baro
 D'eur foennec vrás a dro var dro.
 Na c'houi, merc'het liboudennet,
 Viltançou cam, loudourennet,
 Güelet oc'h eus-hu er vrô-mân
 Biscoas falc'her evel emân ?
 Responent-ia, diouc'h-tu, diouc'h-tu....
 Penos? dre ho, cousq emoc'h-hu?
 Endra vijac'h o trei ho penn,
 E falc'h a droc'hje eur garg foen :

Rac evit se, c'houi voar ervat,
E voa hanvet bourreo ar prat.

Mes, gant e fals voa terruploc'h,
Evel ma zân-da zisqüez deoc'h;
Rac, pa sönje, gant eun tol cren,
E tiscarguis eur scour güezen,
Hac en daou dol fals, trap-fri-frest,
En discoure déch' pront ha prest.
Cric-crac, evit ma er güiot,
En eun tol dorn e ré fagot;
Fagot en deon hac'a zo
Güenoc'h eguet fagot ar vro;
Fagot cloq, grêt mat ha buan,
Nonpas fagodiou bian,
Mes fa~~z~~ tennet dre c'haol Herri,
Fagot capabl, fournus da zévi.

Peoc'h a roñ, elgues Sant Erbot,
Yan an ognon, Fauch bleiz ar yod,
Braguezennec lous, laouennec,
Expert ar moc'h, vil glaourennec,
Ha te sönj dit eta gouzout.
Petra eo fagot goude tout?
Gûir eo ive, fagot a res,
Fall pe vat, evel ma c'helles!
Ja, clasq ober, da barlant sclær,
Mes nonpas evel ma lleer.
Qê, qê, soubl da ben, ampoeson,
Rac poan vrás a res d'am c'halon.
MICHEL ervat a voa eur pot
Evit gouzout ober fagot!

Jarnicoton ! faget a rô ! . . .

Mes sellacuit c'hoas adare.

Azeit, mar qirit, aze,

Ha na det qêt c'hoas alesse.

MOBIN guèz a hent all voa c'hoas.

Eun den güirion, mar boe biscoas.

Eun dévez morgoë ! . . ahao ! . . .

Me roas eul louis-aour dezàn:

Da gas da di va avecat :

Petra res-én, nemet lacat

Eur pes aour fas a voa gantaa

En e blaç da renta dezàn !

A ben eau nebeut goede ze,

Eur mis pe zaou marteze,

Dont Kerdalou d'ar presbit

Lavaret voa ar pez aour fal,

Ha cass Catel buan afo

Da guemen an *Omnis homo* :

En em gaout a rés qer buan.

— » Penos, emomme, artisan,

» Grêt oc'h eus-hu an drama'n dra,

« Evel ma pretant an den-mâ ? »

» — Ia, emezâs, Autrou Cure,

» Réson en deveus al laér-ze.

» N'oa mar ebet, abaoue pehl

» E voa ar pez-se em godet;

» Pa fello dñi e basseal,

» E lavaret dñi e voa fall :

» Qement ha qement, ma sónjis

» En laeat en daouarn justic. »

Eus qement-màn eo déch' anat
 Penos MICHEL n'oa qet gaoüyat,
 Choui m'ho pe eur seurt attanchou,
 En em rofe d'an diaoulou,
 En eun nac'h creñ bo laëronci :
 It, n'och' mad nemet da lastri,
 Fougueerien, tud revollet,
 Tout e râncac'h bezä crougues,
 Mes mår oc'h eus dévotion,
 Prestit mat hoc'h atlantion:
 Neus netra edifiantoe'h
 Eguet ar pez a gontañ deoc'h.

Ma vijes bet a galite,
 Ya faouë-qèz *Omnis homo mei*,
 N'oat qet bet ouzit quer crivel,
 Neuze da bano immortal
 A vije èr e'hazetenou
 Er penn eus da actionou,
 Scrivet, mil bombl a là frisad,
 Gant paragraph ha signolad,
 Mes abalamour n'out qet nobl,
 Out abandonet gant ar boubli,
 Pini ne all estimout den
 A nez cleze pe cocarden,
 Cetu eno evit pe résom
 E tilezer en abandon,
 Hep neus ac'hant neb nremor,
 Ha gouseoude sur da histor
 A zo eur pez eus au drolla
 A ouffet clèves et bed-mà.

Ac'hanta , bragueyer crotet ,
 Disqüilit a c'houï zo potret ;
 Imitit tan. *Omnis homo* ,
 A b'ini ema'r gouel hitio.

M'ho cuel o c'hoarzin , paganet ,
 Tud divalo , cos-doganet ;
 Pa zoc'h contant da viâna ,
 Tavit , pa na dalit netra ,
 Ha grit bremân attantion
 Var ar zeizvet reflexion
 Oc'h eus clêvet bete vremâ
 En comparaison da netru .

Bremâ vo bla da vis here ,
 E voac'h amân îve neuze ,
 An tan goal o veza croquet
 Ne oun penos en hor porchet ,
 MORIN a grimp var an doeh
 Evel gouinver var eur vezet ,
 Ha rampa oc'h al lein neuze ,
 Evel var guein egnancane ,
 Evit arréti , emezâo ,
 An tan goal , o veranchat vartnân ,
 Mes evel m'oa séc'h ar matier ,
 N'allas qet ober e affer :
 Pa gommanças an tan gchilla ,
 Flip ha flap var e dro grillia ,
 Ha dévi memes e voustach ,
 E quittas orac e varc'h louach ,
 Hac e tisqennas izelloc'h
 Da c'houlen sicour diganeoc'h ,

Dreist oll digant Pieres Gravart,

Pehini a voa eur pot bavart,

Gant pehini vije alies,

Dre m'oant mignonet assambles.

E hanvet en d'om'e heritour,

Mar bije evit e zicour.

Pieres Gravart, ouzoc'h eryat,

Ne voa qet terrupl trempet mat,

Qen nebeut hac ai loe bras-se

Zo e tiscrougnal en toul-ze.

Pér a grias var boez e benn :

Dilam eta en eul clam crean.

MORIN d'abord a zilampas

Var goug Graxart, hac et lazas.

Ha goudé tout, d'am zantimant,

E res e dol honestamant.

Ar charite, var a glévan,

A gommanc dreizomp hon-anan,

Ha preferablaman d'an oll,

E tleomp miret d'en em goll;

Hac honestoc'h e dateun den,

Neus fors dezàn dre be voyen,

Mar guell, en em sovetaï,

Eguet n'en dé en em reï.

Eur vech en eur gavas goassoc'h,

Eur c'hart leo ac'hau pe dostoc'h,

En ilis ma c'hexorciset

Eur plac'h coant a voa pessedet,

Guillou, clévit, a lavare,

Dre fors biqen na zortije,

Anez antren en earf Monni,
 Chetu-én nech'het aha fin.
 Tost en eur gave d'an duat,
 Hac er foud e voa tostic mad.
 Mes petra eure va dem-me?
 En em fila eus ao'hane,
 Mont d'ar porchet hac azea
 En eur pingin a voa enna,
 Sevel e vrugouï, trông'e vied,
 Starda e zillad var e dro,
 Plant'e doo bat'e zaoulagad,
 Qemeret toua tress eud pot-mad,
 Ha da grial var bosez e benn:
 « Deus-ta, diaoul, mar dout egn denz;
 » Saill en hemata, mar credes;
 » Souten ar pez a lheres.
 » Avanç eta, d'au avantur,
 » Mar sèz dit; da c'honit out sar.
 » Deus-ta, diavanq eam nébeut,
 » Nemet eom a pe rao da sqend;
 » Rac mar dout fut, vel a glêvio,
 » Ne lèzi qet da incitân.
 » Dired eta, cos diaoul born,
 » Deus, ne mens qetaouens da gorit.
 Petra euffet caput galantoc'h.
 Christenie, m'er goulen ouzoc'h?
 Ebars er vrô-mân ne voa qet,
 Nac en bed antier n'er c'bafilet.
 A brepos, tud, mar beâch amâ
 Dissul Fasq vian divozâ,

Etro pad an oferen bred ;
 Sònj oc'h eus ? perac no pe qet ?
 Ia , dissul e vezò blosas . . .
 Penos , tud sod , n'ouzoc'h qet c'hoes
 Epad ar prôn al lapousset
 Gant calz a drous hac a gaget ;
 Partout amàn dre ar vplziou ,
 Var ar plench hac ar mogueriou ,
 Oc'h ober o neïzou , cetu ;
 Red eo dezê ober eun ta ,
 Ha ne voa goas ober amâ ,
 Pa voa plaçou ar re vrava ;
 Ouspen daou c'chant var peb moguer ,
 Evit mât ermès d'e ober ,
 Grêt voa dezo plaçou quer brao
 Evit gournijal tro vardro ,
 Ma credent oll , en o divis ,
 E voant bourc'hisien eus an ilis ,
 Ha ma rent eur charivari ,
 Eur musiq hac eur jolori ,
 Ma voat o sònjal sur neuze
 Degas an alc'houeziou dézo .
 Just e vije en gûrionez ,
 P'o devoa an huella mouez .

Me glasq rîi da entent deoc'h
 Caout sònj da vinaoui'r moc'h ;
 Qercoulz e vije din tevel .
 Ha pa vijen bet o vervel ,
 Ne voan évit rîi da entent :
 C'houi oll , evel staipou cent ,

Digor caer ganéel'h ho qiaou,
 Hac ho taouarn en ho pragou,
 Ne droac'b ho taoulagad morse
 Divar al louenedigou-ze,
 Hep clasq ar voyen d'ø c'hass pell :
 Mes ap. *Omnis homo MICHEL*,
 Dre ar güir sqiant a gavas
 D'o chasseal an injin vrás.
 E voa d'an ampoent-se azeet
 Aze en plaç ar fabliquet,
 Pa ras sin dñ e zé dezo.
 Me zònj din er güelàn ato .
 Gant e èr naïv, brao ha qempen,
 Oc'h ober sin dñ gant e benn.
 Rac anez anaout e zoare,
 Ne vije den na guemerje
 MICHEL guèz, hon *Omnis homo*,
 Vit pröcurol-fiscal ar vrô,
 Pa vije en e habit brao,
 Rac an habit, clévit, a zao,
 Ha MORIN a voa figuoler,
 Disignac'h qeit ha ma rànquer;
 Pa er güelis oc'h ober sio ,
 E santis penos er grê. dñ ;
 Rac svelse ec'h explige
 Gant e benn ar pez a gare.
 P'er güelis savet en e za,
 E sönjis e zé d'hon laza ;
 Mes, tricolor l'nè qet se c'hoas,
 Eur scubelen a guemeras,

Var ar banc e saill en e za,
 Fredi, fredon, bredi, breda:
 Te ne zi qet, ha te yélo;
 Te ne pezo qet, te pezo;
 Hac eus an eil penn d'eguile
 E rafalc'bas oll evelse.
 Ar güiad qenvid a scubas,
 Al lapousset a zineizas;
 Pilat, distaga, filboucha,
 Separi, chasseal, difouec'ha,
 Difouestra'n neizi a ras crac,
 Hep na chommas na ric, na rac.
 Panefe an *Omnis homo*,
 Petra hor bije-ni grêt eno?
Nescio pos; nan, nan, n'en doc'h
 Entrezoc'h nemet pennou moc'h.
 Ne zeus fors, banden loueou bris,
 Abars ma zin eus an ilis,
 Grit eun nebeut reflexion
 Var an estim hac ar fécon
 En devoa da garillonad
 Pa, vije en e humor vad.
 Gant e glèyer e vusiqe
 Qer caër, qer brao, ma c'hestone
 Qement a glève anezan.
 Gouscoude, selaouit amàn:
 Nan, na bemol na becaro,
 Na foeldr tam music na vouie;
 Hac e lavare e vam c'hoas,
 Penos e voa eun domach bras

Ne voa bet he mab en Paris
 O tesqi lezen an Ilis ;
 Abil estranch e vije bet ,
 Dioc'h an doare ens e speret ;
 A dra certen , salo vije .

Mes lezomp ar c'homroa caér-ze ,
 Ha pignomp en tour a speret ,
 Da zelaou e vusic parfet .
 En peder gorden e crogne ,
 Hep dont d'en em jeni gante ;
 En diou gant e zaou zotn o daou ,
 En ean alt a leiz e e'hinou ,
 Hac e benn oc'h e dreid scoulnet ;
 Ha pa vije en em strellet ,
 En em strincqenne hep nep droug ,
 Evel pa vije eos ar groug ,
 Hac e sonnje ar pévar gioc'h .
 Evel pa bartantjen ouzoch :
 » Ten , ten amâ , ten , ten amâ ,
 » Ten da eva , ten da eva ,
 » Ten , ten güia , ten , ten güin ,
 » Ten güin da VORIN , da VOBAN .

Nac ar c'hèz a voa marvaillus !
 MORIN te a voa burzodus !
 Ouspen an don-ze en devoa
 Manielou ar se vrava .
 Rac eun den abil eun deves
 O tremen amâ dre'r barres
 A lavaras , a meus clévet ,
 Dre'r bourg-mâ ne eua qet da bet ,

Pénos , en eun nécessité ,
 E c'halje comz eus ar roué .
 Evit güir , n'eo qet eun orin
 E voa'r pot qèz MICHEL MORIN .
 Cana rë sur heb leor ébet ,
 Qercouls hac eun ogrou fachet .
 Ractal ma c'hantre en eun ilis ,
 Flap.... var e guein , -chap , surpilis .
 Bale a rë evel eun escop ,
 Atâo , mardiac'h ! sonn ha prop :
 Hac en eur rodal e roje
 Ar merq déch eus a guementse .

Eur blijadur voa e velet
 Pa ranqet mont en tro'r véred .
 Petra oc'h-hu en e guichen ?
 Clévet a refet bremà souden .
 MORIN guèz a voa en ho toues
 Ar memes tra , ia , memes
 Evel ma vez amàn güelet
 Eur golein bome dispaqet
 En creiz eur c'haread panes .

Mes , a lavaro grand-bragues ,
 O respont déch dre ho fêçon ,
 Comparéson neo qet rôson .
 Petra ta ? Guelomp , *distinguo* ,
 Ma n'en dè conform , *concedo* ;
 Mes mar dè conform hed a héd ,
 E tal rôson evel m'eo dleet ;
 Nonpas rôson *strico sensu* .
 Hac e c'hoari emedoc'h-hu ?

Pe'r gomparéson conform-ta,
 P'er rëson fos eo ar güella?
 Goulennit gant potret Rosco
 Pet faven ya da ober no.
 Ha c'hoas e fell dëc'h, eme c'houi,
 Disput var ar philosophi?
 Disqit sònjal abars parlant,
 Ha list en peoc'h an dud savant.
 C'houi euter ma prouvin amàn
 Peguer conform e rësonan,
 P'ho comparachàn oc'h panes?
 Sellaouït-ta, ne qet dies,
 Ne qet red din beza biqen.

Ar guer-ze a banezeyen
 A zo deut demeus a banes,
 Ha rac se ta e zeus iveau
 Entreze rapport mutuel
 Ha relation naturel.
 C'houi è sur ar banezeyen,
 Evel ma tleed er c'hompreñ.
Ergo, pa hñ comparachàn
 Oc'h panes, evel ma er gràn,
 Emeus rëson vad d'e ober.

Ac'hàñ! hñeo brua, ac'hàñ, couer,
 Ac'hanta! ne qet evelse
 Eo digas an dud d'an ere?
 Neo qet evelse èo desqi
 Penos e rànquer rësoni?
 Mes ne avançomp qet netra,
 Nemet sur e vemp da guenta,

Na qen nebeut e rô Morin.

Mes petra dâl dezân anfin?

Cetu-én maro gouscoude.

Ha! *Requiescat in pace.*

Vantre-saht-gril ia, me attest

E voa Morin eun den honest!

Mar dougue bepret bouteu prent,

Ne voa qet dre orgouill certon,

Ras evit preuv a guémentse,

E dad-caer a voa mestr qere.

Qerqent ha ma save e vouez

Bars er gousperou en hea touez,

Ne veljec'h partout nemet châss

Hai! o tecampi eus o flaç.

Ha penevert aon da ober

Eun tam dismeganç d'e vam guer,

Deiz ha nôs e credfen facil

E vije mab d'eun dijentil.

Diana soupçoni zo dleet

Voe gant e vaguerez chenchet,

Pa voa ganet evit ober

Traou quer burzudas ha quer caer,

Pere zo oll mercou patant.

Ne voa qet an den-ze payzant.

O feiz nan; ma vije i've!

Ma a b'revvo deoc'h qementse.

Hac entre daou, e'hoczomp hor'fri,

Ma zimp neuze diouc'h-tu ganû.

Cetu aze ar poent qenta.

Den a ell caout habec ennâ?

Ne gredàn qet e ve ganet,
 Hac er fond ive ne zeus qet.
 Mes abars commanç a neve,
 Qeit ha ma meus amzer ive,
 Da vont da lavarat e zàn
 Eun *De profundis* evitân.
 Ha c'houi ive, banden ezen,
 Criüt qen a faouto ho corzen,
 Pa n'ouzoc'h ho *Te profundis*?
 Sant MORIN, ora pro nobis.
 E zàn d'azea em c'hador,
 Ha dà guntunui an histor.





E I L P O E N T.

EUN devez, neus qet pell a ze,
 Ar potr MICHEL mont d'ar chasse,
 Fusuill carguet, jibicieren,
 Poultr, bour, draje ha cartouchen.
 Pa voe en penn ar valanoc,
 Cetu MORIN o lemel e doc,
 Avanç e benn aziouc'h al lann
 Da zellet entouez ar balan;
 Hac én güelet eun anter-gad
 Entrezec onnàn o tòstat.
 Pebes spectacl évit MORIN !
 Dac, dac, ha mont var benn ur glin...
 Anjou, feu, paon..., hac e filat,
 Ah, vantrebleu, brava tam gad !
 Va den en eul lam dreist ar c'hé,
 Saill var ar c'had, crap en e zé,
 Eun drô var e zeul, ha d'ar gât;
 Ah ! dam, nè zelle qet en èr.
 E divoada hac e farda,
 E brocha hac e ambrocha;

Tréi'r ber, ebar tan dirazi,
 Hac he laqat da frissoni.
 Pa voe prest, e voe servichet
 Oc'h tol evit beza debret;
 Rac ne etzoc'h qet marzeze
 Ne voa tam en ty en deiz-se.
 Commanç a rêt, hep dale pell,
 Biscoas ne veljoc'h netra well.
 O ar madic! ô ar cher vad!
 O güella den! ô matta gad!
 O matta regal! matta boaled!
 Perac ave ne vije qet?
 Poazet e voe croc'hen ha bléo:
 O excelant *Omnis homo!*
 Nan, vantrechien! n'oq qet è bar
 Eotre an ên hac an douar.
 C'hoas en e lamhou voa nöploc'h,
 Evel ma zan d'e zisqez deqc'h;
 Rac MICHEL, va zervicher mad,
 Qer fidel din-me ha d'e dad,
 Eu deus, enpad nombr bлоaveziou,
 Rentet diu calz a zervichou,
 Gouda tout, n'dn qet estoaret;
 Rac, evel m'och eus oll güelet,
 Ha pa n'em bije nemet yod,
 Morin en devije e lod.
 Pa vije bioc'h besq pe dard,
 Em zicoure brao d'o goro,
 Ha ne zerrempp an duelen
 Qen na vooze ar variqen,

Endra vije bara em zy,
 Ne vije qet lent e têbri.
 Beza voan ive en e dy
 Qen bardis vel bars va hini;
 Mes eus va zy-me, gouscoude,
 Pear-hessa eo e veve.
 Ea ur guer, güella ma ellen
 Er beven hac er zicouren.
 Tentet e vijec'h da gredi
 E vije ar mab eus an ty;
 Martezø voa, me n'on doare,
 Netra ne ra dêc'h qementse.
 Diana, sqient en devoa,
 Ha gouzout peur en implija.
 Ia, MORIN am servicho
 A la pilpot, güella m'elle,
 Evel mà er prouvin amân.

Peoc'h a roi, beguel an han !
 Nebaon, n'er gres qet da vanach'.
 Me ac'h avertis, Yan e zac'h.
 Qè, pa deuy da c'houlen da basq,
 M'en assnr did e teuy d'e glasq.
 Mes nemet fas a ve ganes,
 Sellaou an dra-mâ, mar qeres :
 Sellaou peguement a vanq did
 N'en dout qet eur potr intrepid.

N'eus mar ebet, pêvat gure
 A deuas d'am gfelet eur beurc,
 Ha tout, evel p'am bije joa
 Eus o c'haout em zy da leina

» — Penos a ra Autrou Cure ?
 » — Gaillard ato, ha c'houi ive ?
 » -- Evel ma velit, treud atao.
 » Azeit. — Nonpas ; ped heur eo ?
 » Deg heur anter, neve sonet.
 » — O peoc'h, bon, emedomp abred.
 » Ne c'heus qet leïnet c'hoas, cure ?
 » Ne meus qet c'hoas. — Mat, qent a ze
 » Gra oza lein, hac etre daou,
 » Deomp da velet ar jardinou,
 » Ha da laret hor brevier. »
 Ne vouien petra da ober.

Ja, m'en assur, me voa nec'het,
 Rac n'oa fors din pelec'h sellet,
 Ne velen qet ebars va zy
 An tanfiñfoëldr tam da zebri,
 Ha n'oa qet eun diaoustreguez
 Beza en eur seurt tieguez ?
 Petra voa affer ar re-ze,
 Dont d'am güelet-me an deiz-se ?
 Rac cetu, etre c'houi ha me,
 Ne garan qet rei d'an dud-se ;
 Ne qet m'am be c'hoant gouscoude
 E ve publiet qementse ;
 En secret en lavaran deoc'h ,
 D'o peza sot, m'er fi ennoc'h.
 Mes pa voant ta deut gouscoude,
 O lezel hep tam a voa ive,
 Evel a ouzoch, difêçon :
 Rac dare e voant gant an naon,

Mes pe seurt lein da brepari,
 Pa ne voa foeltr tam pesq em zy ?
 Rac me a meus sónj mad bremán,
 Derc'hent ar sul e voa'n dra-mañ,
 Pe derc'hent eur gouel marteze ;
 N'e zeus fors goude tout ive.
 Hoguen mar qirit , fors a zo ;
 Vlijil a voa sur deomp ato.
 Ap *Omnis homo e teuler*
 E zillad var bord ar rivier ;
 Taflao , frrrr , bac en eul lam crenn
 E plonjas en dour var e bepn.
 Ni zònje oll e voa beuzet :
 Mes , jarnicoton ! ne voa qet ;
 Rac souden goude e savas,
 Ha gantàn eur picol pesq bras.
 » Ac'hanta , emezàn deomp-ni ,
 » Tud ar roue mac'haign int-hi ? »
 P'en devoe neuet bete'r bord ,
 E tol ar pesq divar e dord .
 Vantrechien , brava aneval !
 Harça , na brava peñn chatal !
 E c'hinou qen digor gantàn
 Ma cusse oll ho penn ennàn.
 Ènes a voa sur , pa gomzot...
 Tevel a ri , te , dep diot.
 Brassoc'h eo calz da c'hinou-te
 Eguet n'oá hini ar pesq-se.
 Ha te voa capapl da zouteñ
 E vraguezen da eur seurt d'en ?

Ia, ia, façou tartes,
 Morin a voa coq ar barres.
 Ar c'hèz ! Doue d'er pardonø,
 Brava tol a reas eno !
 Neuze e trôngas e vanchou
 Hac eus e habit al lostou,
 E gontellic a zigoras.
 Ha neuze ractal el lemmas,
 Tuf, tuf, tuf, tuf, gric, gric, gric, gric,
 Hac e crog er pesq manific ;
 Nonpas pesqic, mes eur foeltren ;
 E zistrippa brao ha qempen ,
 Ma rejomp gantâu eur ftiço
 A dalie c'hoezec pe var dro,
 Hac eur soç quer mad a voa grët
 Ma lipjomp oll hor biziet.
 O güella pesq ! O güella den !
 Nah, nap, sur, ne sqûzîn bïgen
 E publia partout dre'r vro
 Voa Morin an *Omnis homo*.
 Eur vech c'hoas, matta frigoussen !
 Corbleu, brava jiboloten !
 Qen excelant voe preparet ,
 E carjen e vijac'h o velet ,
 Ha pa n'ho pije anezî
 An distera tam da zebri .
 Evit gûl'r, eus an touch güella
 Voa grët ar frigoussen gantâ ;
 Hac evit rëi da entent dêc'h ,
 Evel pa vijec'h var al tec'h ,

M'en assur, hep laret gueyier,
 Neus marmiton na pastesier
 A osse güelloc'h eun tam boued;
 Ah, dam! c'houï vije güet souezet,
 Ia, pa zònjan gouscoude,
 Pebes tol a res-ao neuze!

MORIN guèz! va bennos varnout;
 Te voa eun den hac en doa gout!
 Rac', evel m'er gouzout ive,
 E voamp coc'h-qy penevert-te.
 Mes petra dal en deiz hirio
 Da VICHËL e oll viraclo?
 Erfin tout, cetu-ën aze:
 Beze'n e blaç piou a garre?
 Foultr an hini n'en dë nec'het;
 Ha va-unan ne garfen qet;
 Evit olt vadou ar bed-mâ,
 Ha pa c'halfen ressuscita.

Tignousien, ma na davit qet,
 Mar c'hoarxit evel ronsceet,
 E ven sot lavaret guer mui.
 Gouscoude evit oc'h instrui
 Da zioüaf piz eus ar maro
 Eo e sermonan déc'h hirio;
 Rac e peb oad, onzoc'h ervad,
 E rânquer, alias! e c'hrapat.
 MORIN a voa c'hoas yaouanq flam
 P'en deus rânget ober al lam;
 Ia, en fleur e yaouanqis,
 Trégont vloas nemet daouzec mis,

O conta biжен na muiqen,
En devoа just ha netra qen.

Tao, tao, fri marmous, gant a ri,
Biжен an oad-se ne veli ;
Crouquet vit abars bla amан,
Ha neo qet eston, a gredan.
Lavaromp c'hoas, p'hon eus amzer ;
Biжен ne vanqo ar matier.

Eun devez eus en em bourmen,
Evel dre eur chanç diaç'hen,
Eur sourd bras a flêmas ennâ,
Er santimant vad d'e laza.

Ac'hanta, eur vech gouscoude,
Petra sònjit var guementse ?
Sònjal a rit sur, ha ne qet,
E voe tost da veza lazet ?
Bah ! . . . ne qet se a éruas,
Rac ar sourd hepqen a varvas.
Ha goude tout, domach vije :
Eus a betra en om velle ?
Rac ne voa qet affer sourdet
Frotta o lost eus MORINET.
Biscoas ne ras qer fall devez
Abaoue ma voa en buez.
Mes evessaït bremâ pis,
Eru ar c'hi var an tapis.

Neus mar ebet, MICHEL o vont
D'ober e guest da Bondeont,
E vistolen a voa gantâ,
Carguet leus couch, na petra ta ?

Mes pa voa éru tost d'eun ti,
 Dilamet eur palfoutren qi,
 Rampa , morgoaë ! e creiz an hent,
 Güell reud e lost , scriignet e zent.
 Pa velas MICHEL , al loën fall
 A gommanç grognal hac harzal.
 An autrou , p'ini er güele ,
 A grias divar bord ar c'hé :
 » Hiss gantàn , Dragon , hiss gantàn :
 » Alòn , Dragon , pill varnezàn . »
 An tam ar blei a aneval
 Ne voa qet en gout da farçal.
 Neus fors , MORIN en deporde ;
 Ar c'hi , oüadù , oüaou , a zirede.
 » Deus amàn , iété , deus amàn . »
 Inutil eo parlant ountàñ.
 MORIN tenna e vistolen ,
 Dragon dezàn en eul lam crenn .
 MORIN : » D'o toul... » ha simei varnàñ ;
 Ar c'hi , bagn , hagn , crimpat outàñ
 Da glasq devori e visach ;
 MORIN hep deport davantach ,
 Dac , dac , banta e vistolen ,
 Tan , paon... ar c'hi disregui crenn ,
 Ha mont ractal en eur grial
 Da guïchen e vestr da yudal .
 Ar goad a ruille eus e vin ,
 Evel an dour eus eur vejin ;
 Rac MICHEL pa losqe tennou ,
 A vize atao d'ar guinou .

Hac an autrou en em c'koueza,
 Degas testou quer brao ha tra,
 Affer da MORIN adare,
 Abalamour d'an tenn caer-ze.
 Galvet ar pot da dy'r sican,
 MORIN en em gaout quer buan.
 Evit r̄eson e lavaras
 D'ar barner en interrojas,
 E voa evit en em difen
 En doa r̄anget leusquel e denn.
 Caer en d'oe, jujet voe ar proces,
 Ha condaonet voe MORIN guès
 Da b̄ea ar c'hi pront ba prest,
 Pe otramant lezel e guest.
 Daou articl goell fachus dezàn ;
 Chut, chut, ha clévit anezàn :
 » Dragon, penevede va zèon
 » En doa va longet hep holen. »
 Hac ar procul eus al lez
 A respont deàn : » Ma carjes
 » E voas bet qüit a guement-màn,
 » Trei gross da vistolen dezàn. »
 » — R̄esen oc'h eus, eme MORIN,
 » Hac ober ze voa va dessin,
 » Ia, ma carje si an autrou
 » Trei o lost el lec'h e c'hipou. »
 Poezet e voe ar r̄eson-ze
 Deus an eil tu hac eguile,
 Cavet valabl evel eur chanç;
 Revoqet ractal ar setanç;

Grêt calz a formaliteou ;
 Grêt da VOBIN ha d'an autrou
 Mont qein-eus-qein var guementse ,
 Evel ar goez a Sant-Jaoüe.

Hac en zo marvaill ? mat ha fall
 Omp oblijet d'en em zioüal
 Ha da veva bete'r maro ,
 Mar guellomp , cousto pe gousto.

Sabredeboa , na pebes den !

Ia , ia , foulaillezen !
 Me euter mont evel eur c'houil ,
 Mar boa eun den e vrô qen habil .

Brava acolist , hâ ne qei ?
 An autrou a chomas estonet.
 Sant Jupiter , c'houi a goze !
 Ennes a voa mezus neuze !

Evidoc'h-hu , bouc'het anat ,
 Ne dalit qet eur grabanat ,
 Ma vijac'h bet en affer-ze ,
 E rancjac'h paea ar c'hi-ze
 Ric ha rac var hoc'h ivinou ,
 Rac ne ouzec'h qet ar e'bosiou .
 Netra , dogan , respes diu-me :
 Ha da VICHET qercoulz ive :
 Rac da c'hinou a zo, re vras
 Vit en em dênn eus eur seurt pas .

Nep a barlant dirac noter
 A renq beza divinouer ,
 Ha c'hoas avoalc'h d'ober gania ,
 Ha re memes peur-liessa .

MICHEL er gré, ze zo certen;
 Mes MICHEL ive a voa den
 Ha n'en doa qet aon rac e squeud,
 Na rac ar justic qen nebeut.

Ia, partout e livirin,
 Hep biqen James e squizin,
 Voa MORIN eun den excelant
 Dreist an oll jeneralamant
 Mes n'eller qet e expliqa,
 Na renta réson anezâ;
Omnis homo a lavar tout
 Ar pez a zo en hor galloud.
 Mes, allas! allas! ne vram qen :
 Evidomp-ni pebes anqen!
 Nan, tud diot, n'est güelimp mui :
Sic transit gloria mundi.

Mes dre e action diveza
 E c'hàñ da zisquel déch bremâ
 Hac e nerz vras hac e gourach,
 Erfin e nebeut a attach
 Evit an oll madou terrien.

Dec'h, dec'h e varvas, christenien;
 Dec'h, da c'hoec'h heur eus ar mintin,
 E loncas eur chopinad güin,
 E pignas hep squeul na netra
 E beg ar vezen huella,
 Evit dineïza ar biguet :
 Claustreou voa dezân laqet.
 Crimpat a eure-ta hep squeul,
 Mac ar maro eriz eus e heul.

Pa voa pignet betec ar beg,
 Hac éruet gant ar biguet,
 E compaças gant as dorn-ze
 Gant pehini e fagode,
 Gant an doro-ze pa gant hini
 Er güelac'h o carillonni,
 Gant an dorn-ze, heb eana;
 E pilje eyr c'hoad en eur gana,
 Gant an doro-ze, ia gant bonnes
 A denne ar biguet érmes.
 Ar biguet coz en dro dezàn
 A grie grâc, grâo, varnezân.
 En a dape al lapoucet
 Hac o dastume er gaquet.
 P'en doa grêt tout nemet disqen;
 E c'haze var eur scour güezen,
 Hac e cri gant eun-ton joaüs :
 » Sellit tout, gounezet emeus.
 » Eur vech all laqit claustreou,
 » Ganeme c'hai ar gonidou.
 » Me-a yêl ta, mic'hieyen,
 » Divar ho coust bremâ souden....
 N'en doa qet peur-achuet e c'her,
 Na veljomp e guillou en aer,
 Discolpet crac ar scour gantâ
 Dre e nerz vrás, na petra ta?
 Coueza a rês a vranc da vranc,
 Tout e torjont, hini ne vanq;
 Flao, flao var ar pave e coue
 A dronç-targas e toquez ar gone.

Var choug e c'hil ec'h éruas,
 E galon a escarmouchas
 E gorf a dresis a voe broustet,
 E gostez a voe disrompet,
 E gôf a antreas en e guein
 Gant ar strong vras demeus ar vein.

Penos, c'leuq, na voelit qet c'hoas
 O clévet eur maleur qer bras!
 Evit pris eur chopinad güin
 Out maro ta, va mab MORIN!
 A varc'hat mad piou n'er péje?
 Da groc'hen hepken en talie,
 Güell e vije bet dit, allas!
 Na piye güelet neiz biscoas. Amen.

FIN.



E Montroulez, imprimeri LÉDAN.

Leuriou a gaver e ty LÉDAN, e Montroulez.

Simon a Vontroulez ; — Buez ar Pévar Mab Emon ; — Tragedi Jacob ha Tragedi Moyses ; — Buez Robert an Diaoul , duc a Normandi ; — Sarmoun var ar Vesventi , rimet evjt iustriiction ar Vretonet , er bloa 1839 ; Ar Bonhom Mizer ; — Collocou galleg ha brezonec , reizet mat , ha cresqeit eus a eun action a lealentez ; — Mestr Pierres , pe den güiziec ar bourg , Antretienou var ar System Metric ; — Collocou familler , pe an Den Expert ; — Conferançou curius , util hsc interessant , evit amusamant ha descadurez an dud diwar ar meaz ; — Michel Morin ; Ar Pantr Côs Richard ; — Ar Buguel Fur ; — Ar Buguel fur da dri bloas ; — Pautr ar Butuu ; — Panch Côs , pe Perachsc Abalamour , ha Michel Pipi , pe ar Farcer Breton ; — Armanagueyer , etc., etc.

— Canticou , Güerziou ha Chansonniou , eun nombr bras ; — Paper ; Plùn ; Liou ; Crayonou ; Canivedou ; Cachet ; Plùn dir ; Reglesnou ; Paper àour hac arc'hant ; Paper fleuriel ; Greun bian da ober goajinier ; Taulennou ; Imachou ; Mein tò fin ha Crayonou da scrifa vanne , evit ar scoliou ; Cahierou bras ha bian ; Portefeuillou , ha pep seurt Deillou , re glas , arc'hant hac aour ; Pennou Hed , arc'hant hac aour ive , oll evit ober Boqedou , ha calz a draou all er guis-se.

— Cartou da c'hoari , Jeuyou Lotto ha Dominoyou , etc.

— Caout a rér ive er memes ty pep seurt Leyriou a zevotion , etc. , etc.

